

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

65. AR GARDIAN KOZ

(follennoù 206 - 210)

Ar Gardian koz a lavare
 Pa trohe bara d'he vugale :

- Ma bugale, ma nem c'heret
 D'al leur neve c'houi n'en diot ket.

- Beza droug gant an eb a garo
 Dar leur nevez me a ielo.
 Raz va c'halon me a zanzo.

o o

An otrou ar c'homt a vonjoure
 En leur neve pa arrue :

- Peseurt merc'het eo ar re ze
 Zo deud aze d'al leur neve ?

Merhet ar gardian koz eo ar rese
 Zo bed errio ez tol Doue
 A dond goude d'al leur neve.

An Otrou ar c'homt a vonjoure
 Mariik ar Gardian enon neuze :

- Mariik /ar/ Gardien, dime leveret
 A c'hwi a raffe eun dro ganeme d'an tachen.

- Biskoas den chentil na refusiz
 Evid ober eun dro en onestiz.

- Mariik ar Gardien, dime leret
 Pegement e koust ar walen
 Deus ho habi& comolot c'hlas ?

- Otrou ar c'homt, va eskusi a red :
 Ne voan ket er ger pa voa peet.

An Otrou ar C'homt a vonjoure
 Mariik ar C'hardien enon neuze :

- Mariik ar Gardien, dime leveret
 Ha c'houi raffe en dro ganime dam dachen.

- 172 -

- Biskoas, den chentil, na refusis
D'ober eun dro en onestis.

- Pegement e koust ar walen
Deus ho habid camolot gwen ?

- Otrou ar c'homt, va eskusi a ret :
Ialc'h va zad a voa digorret
Hag o hini c'houi voa lasset.

Hag en a rei eun toll dezi
A singla ar goad dimeus he fri.

Hag hi dispaka he c'hontelassen
Dindan banden he c'hotillonen.

Hag hi laza en eun instant,
Var ar plass an dichentil iaouank.

Kris vije ar galon na voelche
El leur nevez an neb a viche,

E voëllet al leur neve o rucha
Gant goad an dud chentil ho skuilla.

Anaïk ar Gardien sur a voële
Ne kave den en c'honsole
Nemet e c'hoar Mari ones a re.

- Tavit, va c'hoar, na voelit ket
Me ielo da Baris ma vez red.

Anaïk Gardien a lavare
D'he mam er ger pa errue :

- Grid dime eur bane souben an ognon
Da didezoni va c'halon.

- Petra an torfet ho c'heus gred
Mar de ho c'halon ken dezonet ?

- Torfet ebed me ne meus gret
Nemet el leur nevez ez on bed.

- Seitek dichentil a meus lazet,
An Otrou ar c'homt da trivarc'hvet,
He divoël outo va goërc'htet.

Anaïk ar Gardien a vonjoure
Nag e Paris pa arrue !

- Debonjour, Roue a Rouanes
Me zo deud iaouank d'ho Pales.

Torfet ebed me ne meus gret
Med diffen outo va goëc'htet.

- Mar vicherc'h bed mäl el lec'h fumelen
Me m'boa ho laket en pen va banden

- Pa vije aze anter kant er pors
Evid kombati outo me ne ran forç.

Ne voa ket he gir peurlavaret
Anter kant er porz zo arruet.

Diouto tout en deus kombatet.

- Mar vicher(c'h) bed mäl lec'h fumelen
Me m'boa ho laket en pen va banden.

Me skrivo dec'h var paper glass
He c'haloc'h balle ardis bras.

Me skrivo dec'h var paper gwen
E c'haloc'h bale en pep tachen.

—————
VVVVVVVV

Jannet Kerguiduff, 16 janv. 1851

—————
VVVVVVVVVVVVVV